

- 35 -

Dastumad Pennwern : dornskrid 90

96. AR SERVIJEREZ

(follennoù 28 - 29)

Ne comzan ked doc'h deus ar gommun
 Na ken neubeud deus a nikun
 Nemed deus ar servicherezet.
 Kalz ane a ve imparfet
 E defot da pedi Doue
 E hari malheuriou gate.

Ouman voa eur chervicherez
 E voa pel a voa en eun tiegez

A ne re ken bemdez
 Nemet ober goal vuhez de vestrez

A mont da flattal de vriet
 evid ma vije maltraitet.

En devez a lavaras e mestrez :
 - lavar a guiri dem briet.

An dro man on e neum resolvet
 lavar dezan ober a garo
 e neum resolvet on dar maro.

Pem kraouadur a c'heus ganet
 Ag a heus bed doc'h va vriet,
 eb badichen a heus hi lazet
 Lazet a heus hi eb badijant.
 Venjans a krient insaissamant.

Er bed man punisset a vezi
 a goude d'an ivern da zeви.

- Ke dar retrait, e me e mestrez,
 Doue zo bras e madelez

Ke dar retret a sent ouzin
 Prest e Doue da pardonin.

Komanset e ar vizerablez
 Da voela e klevet e vestrez :

- Ker vras e va c'hrim a va fec'het
 Ne ouffen biken beza pardonnet.

Jardrin e mestr a voa tost d'ar retret
 E lec'h ma devoa e bugale interet.

- 36 -

E retreat, pa e erruet
belek e bed na vije kavet.

A ben ar fin eur belek iaouank
e absolvaz promptamant

Gant kondition ma raje
ar binijen a ordrenje.

Gant ar beleïen all eo bet skandalet
A balamour dar pinijen en devoa roët

- Kit teïr noz da pedi Doue
dar jardrin var bez o bugale.

Nen deus ket renket mont teir nozfez
An noz kenta en deus echuet.
e femp elle en deus goëlet
De devori int e nem laket.

vvvvvvvvvv

Jannton Charlès, 1851, 10 févr.

vvvvvvvvvvvvvvvv